



REPROCH D'ANN TADO HA D'AR MAMMO

Voar sujet nebeut a surveillanc pehini ho deus eun andret ho bugale

Voar don : Diskennomp holl a speret enn Ifern da voelet.

Tado ha mammo kristen, tosteet da glevet,
Ar guentel meurbed touchant, a meus bet composet,
Voar sujet ho bugale couls vel var ho sujet,
Rac eun tam bras ha abec a meus ennoe'h cavet.

Savet ho heus dizourci bugale goall genus,
A breman ezoc'h gant-he sivoas d'ac'h malhuras,
Mar carjac'h bean sentet ouz ho confessorer,
Na voac'h quet er guiz-ze breman gant-he trefet.

Nellet quet ho c'hommandi a c'hoant dac'h d'eun ober,
Losquet ho c'heus a renjen gant-hé voar ho malheur,
Breman c'hoant d'ac'h d'eun ober, da doret d'ho tadmud.
An tezel an tud yaouanq, da doret d'ho tadmud.

A ne quet eur vez goelet ann fado ar mammo,
Vit plegan d'ho pugale renq serin ho guend,
Enn lec'h quemer eur galquen deuz ar gorn arc'heuneut
Evit disquin dè sqaient, eur c'hals pe eun nebeut.

O tra eston hag estranch, o tra ann horraplan,
Golet ar re goz bouffon d'ho bugale breman,
Nemet a c'hoz yabouzec, na rer quen deuz ann tad
Gant bugale elvet pell divoar ann tu mad.

Sellet igit bars er parco bemde n'em ganan,
Quent eo crog tud ar c'houtre gand eur vez da ruyan,
O clévet a chicanniou eve bemde etre-ze,
Deja war crog da crial hu ar vro so warné.

Aman o c'heus gouvezet tad ha c'honi mammo,
Hag-ze kals da c'hevier, staguet ouz ma c'homzo,
Rag ma fell d'ach commandin eo c'honi ve commandet,
Retornet ta enn buguel, breman c'hoaz ha sentet,

Ho kir a glasquet d'echel mes inutil eo dac'h
Biquen a majorité na vo lezet guenac'h,
Ho mab-henan a renko commandin ho menaj,
Roet ta eun dorn dean be in rei ho tomaj.

C'hoaz m'ar geo interresset 'vel meo possubl a ve,
A c'helliet gant confianç quemer en ennan fe,
Moes divoallet mar queret a nefe visso fall,
Pe voelfet ar rod prestec ho trein voar eun tu-all,

Commandin ar vugale brema a zo dies,
Rag sbret e quemeront eun tou meurbed nies,
Divoar ben eun disteran comz a adresset dè
A lequefet mil maliç a mil droug en enn'he.

Ed breman da vutunad portr coz da gorn eun tan,
Eun tommecc dispiljadur wit gouir ganac'h a van,
Mæs bet consolation eun devez a arrio
D'honi vo recompanset deus tout ho oll boagno.

Ho mab ma na gar divoal couls vel ho merc'h,
A voelo eur goel fortun ho redez var he lerc'h,
Biquen nebeut bet bonheur na na gar mammo na tad,
Na birviquen na nefe mar bet goet justic vad.

Tostaeet ta bugale da glevet ma hentel,
A divoallet ne deufac'h pelloc'h d'ober brezel,
Da neb a neus quemeret cals a boan d'o sevel
Bars eun oad a yaouanquis deus en noad a vuguel.

Ped goec'h ha neus quet yunet ho tado ho mammo,
Ho c'hoagno hac o leigno a memes ho mergno,
Wit soulagin ho naon, ho ma zouffac'h eun-ze !
Ouz ho tud en ho c'hosni a germerjac'h true.

Na ret quet a secouarn vouzar breman ta d'am c'homzo
Mar ho heus c'hoant d'exantin ar brassan malheurio,
A sa bet a na vezo birviquen var ar bed ;
Allo eta ma bredeur chang a goudu eo red.

No ve quet ive re yen c'houis ouz ho pugale
Gouffet, igit bet rêt d'ac'h espress gant Doue,
Wit multiplan eur rac deuz he zervicherien,
Ne reign jammes ho bonheur hep suivant ho lezen.

Tachet ta da dol eves, breman oar ho c'honda,
A groet ma guerzongt bepret eun hent ar vertu,
Mar manquet da guement-se a refe ho malheur,
Clesquet eta ma queret breman ho kuir bonheur.

Chetu ze ma brois ebars eur ber gomzo,
Recitet d'ach eur goentel gant eun den hac a so
He haou Yan AR MINOUS, mab da Vari Vorvoan,
A chom en Pleaveur-C'hauter enn placen Sant-Drian.

Dezolation eur plac'h hep goaz, a c'hoant dei da gavet unan.

LAQUET ENN RIMM GANT YANN AR MINOUZ.

Voar don : Ar Rideler hac ar Piquer-Mên.

Penos a ve din bezan contant ?
Herie eun pardon Trezelant,
O vale aman dre ar bourg,
Ma diyareguo a so lound
O redec voar lec'h ar goasset :
C'hoaz binin na hallan tappet.

Sell Mari-Jeann ninjet er mez ;
Penez voar he lec'h me a zo faez ;
Boe ma zeo crog en dord he fôd
A neus chanchet a liou he jôd ;
Na briske mui zellet ouzin
Troet a grênn he deus queign din.

Penez honnez a zo fier
Boe m'he deus tappet Ollier ;
Me ive pa n'arrio Pipi
A vo fterroc'h evuiti ;
Outi ive na gomzin-quet,
Mes Pipi, sivoaz ma n'arri quet.

C'han d'ann iliz, da vianan,
Eur pennadic da discouizan ;
Da lavarret ma pedenno ;
Dre fors me gred harrio,
Quen fin ar pardon, ma zouhet,
Em unann na vale-in quet.

O penoz e z'on scouiz aman
Eun Mari-Jeannie pa zonjan
A zo ho vale gand he tôd,
Me Mari-Vonic a zo zod
O chomman aman en mesq ar zænt,
C'han duze da vordic an hent.

Mûr ar verret zo goal huel,
O penoz a cavan cruel !
Caër a meus sellet en dro din
Pipi-a-bet na zell ouzin.
Queneubet Per, Yann n'ha Jacquez,
Ha mil amôrouz hep mestrez.

Me sonje dime a voant coant
Hac an holl din a nefoa c'hoant
Mæs goelet a ran selder penoz
Ha luch-fen enn guiz d'ar roz
Tvit ma helo ar bautret
Na vongt quet buan debauchet.

Sell ann yeol prest da guzan,
Te gueno-guez, c'hoaz aman ?
Ya, sell a zaout tout da c'hôro !
Querz ta, dimesel hep outro
Buan enn-trezec hac ar guer
Den na bren din n'ha craou n'ha per.
Me meuz aonn maleruzez
Aa renquin n'emn dënn da zeurez,

Petra a rit evit bale
Mesq tud yaouanq d'ann assamble
Tazonin re a ra ma dent
Pa na gavan nep paut em hent.

Pautret avoalc'h sur a gavan,
A voejo ou-thé a c'hoerzan ;
Mæz sivoaz ! caër a meuz c'hoerzin
Larrët dezé comjo badin
Paud-a-bed na zell mui d'am hé ;
Ouz ma goelet gante eo fæ.

Lest ar bautred hardin guenin,
Muan m'allin ho zreitourrin ;
Me rei di-s ho goelec'ho,
A rei difficil ho meujo
P'he n'ho deuz ouzin nep true.
Me a rento dé goall vue,

Ya me rei dé bembe penn fall,
Scouizont-quet ouz ma guogueall ;
P'he na n'on hinin vit debauj
Na rin quet ive ho etoj ;
Me gred dre ma z'eo hir ma dent
Ouz ma goellet oll he deus fæ.
N'ho deus quet ezomn da spontan,
Drouc-on : mæzen den ha groguan,
Nan, n'ha na garfen enn ober
Possub event eun goall humeur
Ho lezfen goë da vont d'ar guer
Gonde coanniou mad : ouz ar ber.

Gouir eo ar bautret n'int quet fin,
Hac hi ho cad gist ha gouin,
Ann amann, ann huo, ar c'hiq,
Ar bâl, ann danc hac ar muzic
Goennin a vijen arri mad
Ma carjent dime goell tostad.

Vit ann anv me a rei caoulet
C'hoaz crampoëz gouiniz alaourret
A bere vo quet fall ar vlaz
Rêd e zeo din gonid ma goaz,
Nann na chomman quet, er guiz man,
Dibenn, diberc'hen da vévan.

Contant on deus ar Goueloard, [riad,
Contant c'hoaz, deus eun Treguer-
Contant eun den de a Guerneu,
Ran forz pe dort, pe gam ezeo,
Contant eun all deus a Leon,
Trist eo bevan hep eur mignon.

Pe hin vo luch, pe hin vo dall,
Pe hin vo toallennet fall,
Gant quement se na n'on quet stric,
Pe nin vo paour, pe vo pinviq.

A ze a ran neubet a gâz
Trist ez'eo bale hep eur goaz.
Ma mammic, a zo arri côz
Raovoanuz enn de hac enn noz ;
P'he na nomp mui vit n'em glêvet
Bed ezeo din cad eur pried,
Ha pidin breman Minouz Yann
Partout dre ar vro d'amm imbann.

Done da rei din ma zouhet ;
Gantan ive pa n'on crouët ;
Evit benvan en guiz d'eun all ;
Graç dar bautret chommongt quet
A ma rentongt oll eur visit [dall,
Disul eur-pënn-zun voar m'habit.

Me mo eun habit zatin goën,
Graç da guement den a voar lënn,
Hac a vo merquet voar-nezan :
« Ho ped true ouz Perinan. »
Bezët prim ha lizer a depad
Evit da dançall he c'here hat.

Man a tiguerrin he gueno ;
Ho cleyet zo ar hent
Groet del anren ebars all li,
He diyareguo n'bingt quet scouis
Quenneubet c'hoas he zreideguo,
Scanv a lige eo he bauto.

Me gret an dud ningt quet disquet
Ammann na zo nemet palodet,
Ne annveont mui ar scritur,
O penos eo trist ma figur !
Renquout mont a darre d'ar guer
Hep craou, allemandes ha per.

Biquen tre vin enn bue
Na valean nep assamble,
Maliç a meus ouz a merc'het
Cassoni c'hoas ouz ar bautret,
Pa na meus mui nep cammarad,
Evidon pebeus calonnad,

C'homman zo eur ganouen
Groet evit discœ ann ancquen
Ann annvui, couls vel ar glac'har
A neus bemde voar an douar
Ar merc'het a reoq chomm hep goaz
Ha trizec vit toussen da choaz.

Ar c'hompositer dioutti
A zo eun denic dizourci
Voar o zujet breman a farz
Ho c'hober ze, vit-gouir eo garz
Dre ma renq bënvan n'ho mesquo
A commzongt vil ouz he c'heno.

YANN AR MINOUZ.